

Son an distoufer Chanté par Kanerien Langazel Collecté par Yanna PLOUGOULM - Fest-Noz
Dastum Bro Leon à Lesneven - 16 octobre 2004 – Rond de Landéda

Son an distoufer, selaouit hag e klevfot (4 gw)
Hag e klevfot kanañ kanaouenn an dour-tan,
Hag e klevfot kanañ son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, eur chañson 'zo kompozet (4 gw)
A-nevez er bloaz-mañ kanaouenn an dour-tan,
A-nevez er bloaz-mañ son an distoufer (2 w)

Son an distoufer 'zo graet d'ar baotred yaouank (4 gw)
'Gav mat an odevi kanaouenn an dour-tan,
'Gav mat an odevi son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, plijadur vras ho pefe (4 gw)
Mar gellfot hen deskiñ kanaouenn an dour-tan,
Mar gellfot hen deskiñ son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, na pa'z it-c'hwi d'ar foarioù (4 gw)
D'ar foar pe d'ar marc'had kanaouenn an dour-tan,
D'ar foar pe d'ar marc'had son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, ne c'hell ket ar marc'hadour (4 gw)
Ganto en em akordiñ kanaouenn an dour-tan,
Ganto en em akordiñ son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, ken 'vez prometet deho (4 gw)
Eur banne odivi kanaouenn an dour-tan,
Eur banne odivi son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, koll 'reont o jilettenoù
O zok diwar o fenn, kanaouenn an dour-tan
O zok diwar o fenn, son an distoufer

Son an distoufer, setu aze braoañ micher (4 gw)
D'ar gwazed diskabell, kanaouenn an dour-tan,
D'ar gwazed diskabell, son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, deomp 'ta bremañ d'ar merc'hed (4 gw)
Hep feukañ den ebet, kanaouenn an dour-tan,
Hep feukañ den ebet, son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, koll a reont o zavañcheroù (4 gw)
O c'hoef diwar o fenn, kanaouenn an dour-tan,
O c'hoef diwar o fenn, son an distoufer (2 w)

Son an distoufer, setu aze braoañ micher (4 gw)
D'ar merc'hed diskempenn, kanaouenn an dour-tan,
D'ar merc'hed diskempenn, son an distoufer (2 w)

Lalala... Tralalaladando kanaouenn an dour-tan, Tralalaladando son an distoufer (2 w)